



**Prezegenn Lena Louarn, Prezidantez Ofis ar Brezhoneg
Klub ar gazetennerien - Roazhon
22 a viz Ebrel 2009**

**Allocution de Lena Louarn, Présidente de l'Office de la Langue Bretonne
Club de la presse - Rennes
22 avril 2009**

Aotrou eilmaer,
Itronezed hag Aotrounez dilennidi,
Itronezed hag Aotrounez,
Mignoned ker,

Laouen on o vezañ amañ, asambles ganeoc'h, evit sinadur ofisiel *Ya d'ar brezhoneg* gant Strollad Breizh. An eil strollad politikel eo Strollad Breizh hag a sin an emglev.

Monsieur l'adjoint au maire,
Mesdames et Messieurs les élus,
Mesdames et Messieurs,
Chers amis,

Je suis heureuse d'être parmi vous pour la signature officielle de *Ya d'ar brezhoneg / Oui à la langue bretonne* par le Parti Breton. Le Parti Breton est le deuxième parti politique signataire de l'accord.

Ya d'ar brezhoneg eo unan eus ar binvioù a ginnig an Ofis evit ma'z afe plas ar brezhoneg er vuhez foran war-raok. E miz Here 2001 eo bet roet lañs d'ar c'houlzad-se. Pediñ a raemp holl obererien kevredigezh Breizh da sinañ an emglev evit reiñ an tu d'ar brezhoneg da ziorren en un doare padus hag aesaat e implij reizh ha naturel er gevredigezh. Diazezet eo ar c'houlzad-se war sontadegoù a sav a-du gant ar brezhoneg a zo bet kadarnaet gant un enklask nevez zo. Evit ma vleugnfe ar brezhoneg en-dro ez eomp da welet obererien bed an armerzh, ar sevenadur, ar sport hag ar politikerezh evit kinnig dezho e vefe kemeret diarbennoù evit hor yezh. 642 aozadur o deus sinet an emglev *Ya d'ar brezhoneg* bremañ.

Ya d'ar brezhoneg est l'un des outils proposé par l'Office pour permettre au breton de progresser dans la vie publique. En octobre 2001, la campagne était lancée. Nous invitons tous les acteurs sociaux de Bretagne à signer cet accord afin de permettre le développement durable de la langue bretonne, de favoriser son emploi naturel et normal dans la société. Cette campagne s'appuie sur des sondages favorables à la langue bretonne confirmés il y a peu de temps. Pour que le breton s'épanouisse à nouveau, nous allons à la rencontre des acteurs du monde économique, culturel, sportif et politique pour leur proposer des mesures pour notre langue. Aujourd'hui, 642 organismes ont signé cet accord.

Aet eo war-raok plas ar brezhoneg er vuhez foran er bloavezhoù tremenet. Muioc'h-mui a strollegezhioù lec'hel a seven oberoù a greñva plas ar brezhoneg er gevredigezh. Evel-se e vez gwelet ar yezh en-dro war ar pemdez. Pouezus eo evit ar yezherien. Soñjal a ran e bed ar c'helenn iveau hag a zo strategel evit dazont ar brezhoneg. Ret eo deomp gounit emgann an niver a vrezhonegerien. N'eo ket dibosupl. Graet eo bet e Kembre hag en Euskadi hag an hevelep tra a c'hallomp ober amañ e Breizh pa welomp ez eo div wezh brasoc'h an dregantad a vrezhonegerien etre 15 ha 19 vloaz eget hini ar re 20-39 bloaz. Emichañs e roio Ofis Publik ar Brezhoneg an tu deomp da brogrammiñ ha frammañ ar c'helenn divyezhek. Gallout a ra ar c'humuniouù kemer perzh en emdroadur-se iveau o sevel a-du evit degemer skolioù ha magourioù divyezhek da skouer hag int a c'hall kemer an intrudu da vont war an hent-se zoken. An div dachenn-se, an endro yezhel hag ar c'helenn, a rank mont war-raok war un dro. Yaouank eo Strollad Breizh, n'en deus ket kalz a zilennidi c'hoazh ha koulskoude en deus sikouret dija evit kas teuliad ar brezhoneg war-raok. Pouezus eo harp an dilennidi ha sinadur Strollad Breizh hiziv peurgetket.

Ces dernières années, la place de la langue bretonne dans la vie publique a progressé. Les collectivités locales qui réalisent des actions renforçant la place du breton dans la société sont de plus en plus nombreuses. C'est ainsi que la langue redevient visible au quotidien. C'est important pour les locuteurs. Je pense également au secteur de l'enseignement qui est stratégique pour l'avenir de la langue. Nous devons gagner la bataille du nombre de brittophones. Ce n'est pas impossible. C'est ce qui a été fait au pays de Galles et au Pays Basque et la même chose peut être faite ici en Bretagne quand nous constatons que le pourcentage de brittophones chez les 15-19 ans est deux fois plus élevé que chez les 20-39 ans. J'espère que l'Office Public de la Langue Bretonne nous donnera les moyens de programmer et structurer l'enseignement bilingue. Les communes peuvent également participer à cette évolution en favorisant par exemple l'accueil d'écoles et de crèches bilingues, elles peuvent même en être à l'initiative. Ces deux domaines, l'environnement linguistique et l'enseignement, doivent avancer en même temps. Le Parti Breton est jeune, il ne compte pas encore beaucoup d'élus et pourtant il a déjà contribué à faire avancer le dossier langue bretonne. Le soutien des élus est capital et c'est pourquoi la signature du Parti Breton est importante aujourd'hui.

O sinañ hiziv ez a pelloc'h Strollad Breizh eget embann emañ a-du gant ar brezhoneg. Divizout a ra ober gantañ en e vont en-dro. Pragmategezh en deus ezhomm ar brezhoneg a-benn seveniñ oberoù fetis. Sed aze ar pezh en deus komprenet mat Strollad Breizh : al logo, ar paper-lizher, al lec'hienn Genrouedad divyezhek, stummañ izili, implijidi ha dilennidi ar strollad war ar brezhoneg ha war ar politikerezh da gas da benn evit an divyezhegezh, implijout ar brezhoneg e-pad ar prezegennouù ofisiel, envel un den dave e karg eus ar brezhoneg, skoazellañ teuliad ar brezhoneg en tiez-kêr ma'z eus dilennidi eus ar strollad, setu un nebeud eus an 18 ober bet dibabet gant Strollad Breizh.

Gourc'hemennouù deoc'h.

En signant aujourd'hui, le Parti Breton ne se contente pas uniquement de déclarer qu'il est favorable au breton, il décide de l'utiliser dans son fonctionnement. Le breton a besoin de pragmatisme afin de réaliser des actions concrètes. Le Parti Breton l'a bien compris : logo, papier de correspondance, site Internet bilingues, formation des membres, employés et élus à la langue bretonne et à la politique à engager pour le bilinguisme, utilisation du breton pendant les discours officiels, nomination d'un responsable langue bretonne, soutien au dossier langue bretonne dans les mairies où sont présents des élus du parti, voici quelques unes des 18 actions choisies par le Parti Breton.

Félicitations.

Trugarez deoc'h.

Merci à vous.